

—: SILVESTRIK :—

Andantino.



E - tre cha - pel sant Efl - lam ha tos - sen Me - ne Bre 'zo



eun of - fi - ser yaou - ank, gan - tan eur pez kle - ze, 'Zo



eun of - fi - ser yaou - ank o se - vel eun ar - me, Me



'meuz eur mab Sil - ves - trik a la - var mont i - ve.

1

Etre chapel Sant Eflam ha tosen Mene Bre,
'Zo eun offiser yaouank gantan eur pez kleze,
'Zo eun offiser yaouank o sevel eun arme,
Me 'meuz eur mab Sylvestrik a lavar mont ive.

2

« Siouaz, aotrou Kabiten, 'meuz ken mab nemetan,
Ganen c'houi 'po 'r vadelez da lezel anezan. »
— Allaz! tad koz maleuruz, ar marc'had 'zo sinet;
Touchet en deus an arc'hant, d'an arme 'rank kerzet.

3

A-berz an tad glac'haret, var dachen ar vrezel,
Eun dervez eul labousik a nij a denn-askell:
— « Deiz mad d'eoc'h c'houi, Silvestrik, deiz mad ha levenez,
Penaoz emma ho yec'hed, ho nerz hag ho puez?

4

— Disken 'ta, labous bihan, disken var da zaou droad,
Ma skrivin d'it eul lizer da gas d'ar gêr d'am zad:
« Yac'h eo ho mab Silvestrik, yac'h ha laouen bepred;
» Dizale e tistroio var-zu e vro garet. »

5

An tad bemnoz ha bemdez ne baouez da zonjal
En e grouadur yaouank en arme e Bro-C'hall:
E kreiz an noz, ec'h hunvre hag e stag da ouela:
« Aotrou Doue, Silvestrik, petra deu da vezal! »

6

Pa oa an tad glac'haret oc'h ober e glemmou,
Setu e vab Silvestrik 'toul an hor o selaou;
« Paouezit, tad ankeniet, paouezit da ouela;
Sellit, ho mab Silvestrik 'zo digouezet ama! »

Dastumet gant P. Tra.